

Rosmelchon.

Va zad va mam ma nam c'heret
n'am c'hassit ket d'ar varadek

n'am c'hassit ket d'ar varadek
gant Rosmelchon on gourdroutet.

— gourdroutet an eb a garo
D'ar varadek c'houi a ielo.

C'houi a ielo d'ar varadek
gant ho paeron oc'h goulennet.

N'otrou Rosmelchon a lavare
De pod a gamp eun deiz a voë :

Me a vel erru eur c'had pen gwen
eur podad lez zo var e fen.

An otrou rosmelchon a lavare
Da vargodig eun deiz a voë :

Pelec'h a deuet na ma zed
na ma c'heus esper da vonet ?

Da kas lez da Kervezenek
e man enon ar varadek.

gant va faeron on goulennet.

n'otrou rosmelchon a lavare
da Vargodik eun deiz a voë :

Dissamit ho podad lez pa gerfet
Fe teiz enon na viod goëled

Mar bezan me itron en ti man
Digassit din skabel da asseza.

An otrou Rosmelchon a lavare
Da Vargodik eun deiz a voe

Deomp-ni breman d'ar jardrin
D'ober eur boket louzou fin

D'ober eur boket tin a levant
A zere deus an dud iaouank.

Margodig a lavare
D'an otrou rosmelchon eun deï's a voe :

ne meus ket affer o bokedou
en Kervezennek e zeus kanviou

Mab an otrou a zo maro.

An otrou rosmelchon a lavare
Da Margodig pa he c'hleve :

— Dem n hi breman dar jardrinou
Da dava ar per an avalou

Margodig a lavare
D'an otrou Rosmelchon pa he c'hleve :

— ne meus ked affer o c'halvalou
Rag o c'hroc'hen a zo c'houero.

Dallit va c'hontel allaouret
a divoëllit na neum trohet.

ne voa ket e c'hir peur lavaret
en he c'halon e deus-hi plantet.

ar gouernenez a lavare
D'an otrou rosmelchon eun deï's a voë :

Breman c'houi a vezo distrujet
Gant an otrou *Kervezennek* (1)
he fillorez o c'heus lazet.

Mar voezen e raen eun droug dezi
ma plante va fognard heni.

An eb a velche an otrou Rosmelchon
Doc'h ar ber evel eur c'hochon.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) Le mot K/ervezennek, ainsi orthographié avec le K/